

16.

Nag a dristidiguez  
Ran-kaon, anken  
Er bed-ma aliez  
A ve lod an den.

17.

Hon c'horf a ve flastret  
Gant ar c'hlenvenjou,  
Ha gant an droug-speret  
Taguet hon eneou.

18.

Va c'halon zo skuzet  
Gant poaniou r bed-ma  
Mont d'an Env d'he kueleit  
A garjen brema.

19.

Eurus en ho kichen  
Ni velo Jesus,  
Ni gano da viken,  
Mam drugarezus :

DISKAN :

*O Guerc'hez Guernilis,  
O Mari, Mam Doue,  
Ama eus och Ilis  
Klevit ho pugale.*

IMPRIMATUR :

21 Septembre 1881.  
DU MARHALLAC'H, Vic. gén.

Kemper, moullerez, 7, ru an Dudchentil.

# CANTIK ITRON-VARIA GUERNILIS

E PARREZ CORAY

Ton : *Laudate Mariam.*

1.

Kanomp a vouez huel  
Mari, Mam Doue,  
Ni oll e Breiz-Isel  
Zo he bugale.

DISKAN :


*O Guerc'hez Guernilis,  
O Mari, Mam Doue,  
Ama eus oc'h ilis  
Klevit ho pugale.*

2.

Kalon ar Vretonnet  
Atao, a viskoas  
D'ho Mam muia karet  
Zo bet digor bras.

3.

Gant mein dantelezet  
O deus hon tadou  
D'ar Verc'hez benniguet  
Savet ilisou.



4.

Hoguen ilis kaëra,  
Na kaëra ilis !  
D'an Itron-Varia  
Zo e Guernilis.

5.

Guernilis zo brudet,  
Chapel burzudus !  
Enhi e ve kavet  
Graçou Mam Jesus.

6.

Var bord ar prajeier  
Karguet e vleuniou  
E sav santel ha kaer  
Azioc'h ar c'hleuniou.

7.

Guernilis benniguet  
Lec'h leun a zousser  
A bell amzer choaset  
Gant Mam hor Zalver.

8.

Eno e teu bemde  
Ha gant fizians vras  
Da bedi Mam Doue  
Tud eus a bell bras.

9.

O Mam drugarezus,  
Na kaera graçou  
Oc'h eus digant Jesus  
Bet d'hon eneou

10.

It oll gant levenez,  
Den fur..., pen diank,  
Da bedi ar Verc'hez  
It koz ha yaouank.

11.

It tad, mam ha buguel,  
It tud an Arvor,  
Divrec'h hor Mam zantel  
Deoc'h oll zo digor.

12.

Piou c'helfe lavaret  
Niver ar graçou  
E Guernilis skuillet  
Var hon eneou ?

13.

Kaout a ra d'ar pec'her  
Distro var Doue  
Ha dirag he varner  
Truez d'he ene.

14.

D'an dali ro ar guelec,  
Ners d'an digalon,  
D'ar bouzar ar c'hlevet,  
An Env d'an anaon.

15.

Allas, nag a boaniou  
Goez varnomp bepred ?  
Blonset eo kalonou  
Cals a dud er bed.